

# Soniou

## EVID AR

2 wennek ar pezh

**Klemgan Nevez**

VAR

**dismantn al lestr "Liberté"**

c'hoarvezet ar 25 a viz gwengolo 1911

Var don : Paotred Plouillo.

D'ar bemp varnugent gwengolo  
Ebarz er rad a Doulon  
Zo digouezet eun taol garo  
Gant ar Voraerien vreten.

A zo bruzunet en mil damm,  
Mouget pe beuzet er mor.

Ar strons a zo bet ken souden  
Ma zo bet meur a hini  
Lazet foyez ar sikeurerien  
A zeue helibini.

D'ar sul da noz, martoloded  
Al lestr-brezel *Liberté*  
A oa et dinec'h da gousket  
Heb gwelet netra neve

Ebarz ar porz-mor al listri

# 11 Taldir

## AR BOBL

18 real ar c'hant

### Kanaouen Ian Soudard

*War eun ton gallaou anavezet*

Hallo, Soudard ma mignon, lon la,  
Hallo, Soudard, ma mignon,  
Kemeromp 'ta kalon,  
Ha kanomp c'hoaz eur sonen,  
Kemeromp 'ta kalon,  
Ha kanomp c'hoaz eur son !

Kanomp bepred 'n eur gerzet, lon la,  
Kanomp bepred 'n eur gerzet,  
Hag hon diouc'har skuizet,  
A bigno c'hoaz ar grec'hen,  
Hag hon diouc'har skuizet  
A zivorzo abred.

Pa ve great al leo genta, lon la,  
Ar sac'h a bounnera  
Hag ar c'hartoucherennou,  
Hag er c'honchou gouter beb noz

— Bugel an aochou ma mignon,  
Martolod a Vreiz-Izel,  
Da betra e zonzj da galon  
Pa vez var ar wern uhel ?  
— Pa ia plen al lestr gant ar mor  
Me zonzj en traou dremenet  
Ma spered a guita e glor  
Vid nijal d'am bro garet.

— Lar d'in, martolod ma mignon,  
Pa strak an fennou kanol  
Da betra e zonzj da galon  
E-kreiz an emgann diroll ?  
— Me zonzj 'barz em heur diveza  
Hag em mam baour zo er vro,  
Hag e pedan santez Anna  
D'am diwall deuz ar maro !

— Lar d'in, martolod ma mignon,  
Ken pell euz da vro garet,  
Da betra e zonzj da galon,  
Pa vez er hamak keusket ?  
— Pa ven em hamak pak t'kloz  
Me zonzj 'barz ma zi bihan  
Hag er c'honchou gouter beb noz

D'ar bemp varnugent gwengolo  
Ebarz er rad a Doulon  
Zo digouezet eun taol garo  
Gant ar Voraërien vreton.

D'ar sul da noz, martolodad  
Al lestr-brezel *Liberté*  
A oa et dinec'h da gousket  
Heb gwelet netra neve.

Mez var dro peder neur bennag  
D'al lun vintin, ar c'hleron  
A ziston, ha deuz e hamak  
« Mathilin » zail dispouron.

« Petra zo ? » « Tan ! » Sethu ar c'hri  
A red a dreuz d'an noz du...  
Pephini 'n em rent d'e impli  
Kreiz ar moked a bep tu.

Deuz fonz al lestr braz *Liberté*  
Teu eur flêr meurbed estlamm,  
An tan zo krog 'barz ar poultr' B !  
-- Hardi, paotred ! dour d'ar flamm !

Mouez an ofiserien a zao  
Vid rei kourach d'ar baotred,  
E kreiz an uho hag ar chao  
Ar vouez a zo silaouet

Klevet a rer strakadennoù  
Mez d'an traon eo red diskenn  
Da zialc'houezi ar sklujou  
Da skuill dour var ar walen.

Mez tuelen an dour, maleur,  
Zo stanket ! Petra zo kaoz ?  
Ar goulou a varv var an heur,  
Kouezet al lestr kreiz an noz.

Ar c'hleron neuze a dregarn  
Evid gervel d'ar *Sikour* ;  
Euz baë Toulon dek lestr houarn  
A ziskenn bagiou en dour.

Kant a dud euz o akuipach  
A roenv var bouez o divrec'h  
Evit tostaat leun a gourach  
Ouz o breudeur kreiz an nec'h.

Mez an tan a zalc'h da greski,  
Al lestr braz a flammijen,  
Ne dal ket esa enebi  
Eürus an hini 'n em denn !

Da bemp heur-hanter ar beure  
Eur strak spontus ha pounner  
An euz sklaket al *Liberté*  
Vel eur votez 'barz an aër.

Eul lestr a bevarzek mil tonn  
A zouge seiz kant a dud  
A dale tregont milion  
Zo brevet en eur munut.

Al *Liberté* vel eur volkan  
A daol flamm, moked, ludu,  
Pemp kant troatad e sao an tan,  
An dir a strink a beb tu.

Hag ekreiz hevelep estlamm  
Korfou moraerien Arvor

A zo bruzunet en mil damm,  
Mouget pe beuzet er mor.

Ar strons a zo bet ken souden  
Ma zo bet meur a hini  
Lazet 'touez ar sikourerien  
A zeue helibini.

Ebarz ar porz-mor al listri  
A grenaz evel plusk kraon ;  
Hijet e oant var o heori  
Deuz ar wern beteg ar staon.

Kear Toulon a oa dihunet  
Gant ar strakaden dispar,  
Gwer var an tier oa torret  
Faoutet muriou heb arvar.

Pa oa et kuit ar vogeden,  
Mouget an tan gant ar mor,  
Oa gwelet penoz ar walen  
A oa spontus en horror.

Eul lestr kaer ne oa ken netra  
Nemed hernach bord an aod,  
Ha gant an Ankou falc'het oa  
Daou c'hant tregont martolod.

Euz peder lestr, tud lac'het mik  
Eveuz al lestr *Liberté*,  
*Démocratie* ha *Républik*  
Hag eveuz ar *Vérité*.

Heb konta c'hoaz eiz ugent all  
Gouliet bihan pe vraz  
Hag a soagner en hospital,  
Esper zo ne voint ket waz.

P'eo bet klasket ar re gollet  
A zo bet, dre c'hras Doue,  
Adkavet meur a gorf flastret  
Anavezet heb dale.

Famillou kalz a viktimou  
A resevo o mennoz,  
Hi intero ar relegou  
Ebarz bered o farroz.

Mez ar re all a zo poazet,  
Puluc'het en tan-ifern  
Ar re-ze na vo ket gallet  
Digas d'ar gear o eskern.

Mez holl merzerien ken braz koll  
Kouezet ekreiz an danger,  
A vo enoret gant an holl  
Vel tud maro 'n o dever.

Beza vo konzolasion  
O c'herent en o enkreiz  
Sonjal penoz an Nasion  
Zo daoulinet var ar bez.

Kleier Arvor, kleier Argoat,  
Sonit en tour peb chapel  
D'ar Vretoned a skuill o gwad  
Da harz Bro-C'hall da vervel.

Ebarz er Gloar, o Anaon  
A vo eüruz gant Doue...  
Mar chom *Frankiz* en peb kalon  
Daoust da goll al *Liberté* !...

Kanomp bepred 'n eur gerzet,  
Hag hon diouc'har skuizet,  
A bigno c'hoaz ar grec'hen,  
Hag hon diouc'har skuizet  
A zivorzo abred.

Pa ve great al leo genta, lon la,  
Pa ve great al leo genta,  
Ar sac'h a bounnera  
Hag ar c'hartoucherennou,  
Ar sac'h a bounnera  
War griben an diouскоa.

Mez d'an eil leo, ni zonjo, lon la,  
Mez d'an eil leo ni zonjo,  
En hon zud zo er vro  
Ha hi koz ha glac'haret,  
En hon zud zo er vro  
O c'hortoz hon distro.

Ha d'an derved leo brema, lon la,  
Ha d'an derved leo brema,  
Ni zonjo da genta,  
'N hon mestrezik dudius,  
Ni zonjo da genta  
'N hon mestrez ar c'hoanta.

D'ar bederved leo, zonjomp lon la,  
D'ar bederved leo, zonjomp  
Er pardoniou brudet,  
Hag en holl asambleou,  
Er pardoniou brudet  
Lec'h hon euz bet danset.

Ha d'ar bemped leo goude, lon la,  
Ha d'ar bemped leo goude,  
Ni zonjo er c'honje,  
Hag er permissionou,  
Ni zonjo er c'honje,  
Bevet al liberte!

D'ar c'houec'hved leo ni zonjo, lon la,  
D'ar c'houec'hved leo ni zonjo  
En termen diveza,  
Pa vefomp dishualet,  
En termen diveza,  
Leusket ar vuez-ma!

D'ar seizved leo ni zonjo, lon la,  
D'ar seizved leo ni zonjo,  
Barz ar repoz buan,  
Rag ar zac'h zo gwall bounner,  
Barz ar repoz buan,  
Hag er c'hantonaman'!

Pa vemp er c'hantonaman', lon la,  
Pa vemp er c'hantonaman',  
War ar plouz astennet  
Ni gousko eveld aële,  
War ar plouz astennet,  
E-kichen al loened!

## Kanaouen ar Martolod

— Lar d'in, martolod ma mignon,  
A red ar mor penn da benn  
Da betra e zonj da galon  
Pa groz an dour 'n az kichen?  
— Me zonj neuze d'am dousik koant  
Am gortoz en eur ouela,  
En Lokrist parrez Trabriant  
Ha ma spered a grenva!

Hag e pedan santez Anna  
D'am diwall deuz ar maro!

— Lar d'in, martolod ma mignon,  
Ken pell euz da vro garet,  
Da betra e zonj da galon,  
Pa vez er hamak kousket?  
— Pa ven em hamak pak t'kloz  
Me zonj 'barz ma zi bihan  
Hag er c'honchou gonter beb noz  
En dro d'an oaled ledan.  
— Lar d'in, martolod ma mignon,  
Goude eur veaj en bro pell  
Da betra e zonj da galon  
Pa vez var hent Breiz-Izel?  
— Me zonj em zud c'han da weled,  
En iliz ar barrozik,  
Hag em dimezi a vo gret  
Etre me ha ma dousik.

Gouel Unvaniez Breiz ha Bro-C'hall  
(29 Here 1911)

## Prinsez Tour Arvor

Breiz ha Bro-C'hall o vond d'en em unani.  
(Inscription figurant sur le monument Boucher.

Savet e-harz ar mor eonennet  
Troid he reier ebarz an dour,  
Arvor, bro goz ar gwir Vretoned  
En penn Bro-C'hall a oa eun Tour.  
Eun Tour garrek kaled difuskul  
Padus, didrec'hus, ha garo  
Hag ar gwagennou braz divuzul  
A re eur gouriz en e dro.

Ebarz an Tour-ze, aboue mil bloaz,  
Eur Brinzez iaouank bleo melen  
A veve lipr, e-kreiz tre ar Groz  
Ar C'hleze dir hag an Delen.  
Menec'h, Barzed ha Brezelidi  
A re d'ezhi eur gward enor,  
Fouge a oa gant ar Vreizidi  
O komz euz Prinsez Tour Arvor.

Prinsez Tour Arvor oa c'hoanteef  
Gant kalz a Brinsed galloudus;  
Meur a wech e oa bet esaet,  
Hi zenna diouz an Tour nerzus;  
Ar Saoz, an Allmand hag an Spagnol  
Hag ar Gall, pephimi d'e dro  
A oa deut, dre gleze pe kanol,  
Da glask laërez Gwerc'hez hon bro!

Mez ar Brinsez kaër meleganez  
Distag he c'halon diouz ar bed  
Ne felle d'ezhi bout rouanez  
Nemed var gouenn ar Vretoned  
Hag he marc'heien, paotred difourm  
He sujidi, he holl boblanz,  
A chome dorn ouz dorn evid stourm  
Beb eil ouz Bro-Saoz hag ouz Franz.

Mez eun deiz eur Roue estranjour  
Iaouank, pinvidik ha dijat  
A c'hallaz 'n em gaout beteg an Tour  
Ha dre an norik antreal.  
Ha p'he devez gwelet ar Brinsez  
Stum flour ar marc'hek a vro bell  
He deuz asantet bout Rouanez  
Var Vro-C'hall ha var Vreiz-Izel.

Ar pez na neuz ket gret ar brezel  
Nag an emgannou hir ha ter  
Eur begad Karante, eun tam zell,  
Zo bet awalc'h evid ober !...  
Liamm an Eureud 'neuz unanet  
Diou vro ha diou bobl enebour,  
Ar Fransizien hag ar Vretoned  
A zent ouz Prinsez kaer an Tour.

Meur a bried 'neuz gret galantiz  
D'ar Brinsez estranch ha melen  
Mez ar Brinsez 'deuz bet iaouankiz  
Hag a bado da virviken !...  
Ken hirio an deiz ar Vretonez  
— Eat ar Rouane d'ar bed all —  
Zo bepred var an Tron Rouanez ;  
*Hi zo deut* : REPUBLIK BRO-C'HALL.

---

## DISPUT

etre eur Soudard hag eur Martolod

---

*Ton Dans Tro*

### Ar soudard

Demad d'id, kamarad, penoz e ma ar bed,  
Sethu tremen daou'la n'hon boa ket'n em weled.  
E pelec'h e oas-te oc'h ober da zervich ?  
Te zo eur martolod a zo kanfard mar plich !

### Ar martolod

Eur c'hrog dorn a ran d'id, ha joa d'id ma fotr ker,  
War ar *Charles-Martel* daou'la so on gabier.  
Ha te ? En peseurt bro out gant da vragou ru ?  
Sethu te deut eur gwaz ha chenchet a bep tu.

### Ar soudard

Er gear a Sant-Briek on soudard daou'la so,  
'Barz ar c'hazern Charner, ar goanta deuz ar vro ;  
Eno ar chambreou a luc'h evel gwer skler,  
Hag ar paketajou o zao plom'barz an er.

### Ar martolod

Petra a glevan-me deuz da c'hinou, soudard ?

### Ar soudard

Forz a zo, ma fotr kez, soudard  
Gallout a ramp anzao ec'h eo p  
Kaled eo ar vicher ha diot alie  
Evid ar Vretoned dreist-holl ec

### Ar martolod

Ia vat, me 'meuz klevet penoz  
Ar paourkez Bretoned vije gre  
Ha penoz ar « Maho » ne oa me  
Daoust hag hen e ve gwir kem

### ar soudard

Siwaz ! Var ar poent-se ec'h on  
Barz kazerniou hon Breiz, war  
Normanted, Gallaoued, ha tud  
Dalc'hmad e fell gante iafe pep

### ar martolod

Ama e trec'h ar mor war blank  
Aze ma mignon kez, a teu gan  
Mesk ar vartoloded, an dri c'ha  
Ar Breton a zo mestr war c'ho

### ar soudard

Gwell a ze, martolod, mez poer  
Arru eo d'emp ar c'hlast ! Eur  
Kenavo, red eo mond. Ni 'n em  
Mar ma deu ket brezel da gas o

### ar martolod

Kemer amzer, soudard ! 'Benn  
Ni 'momp kavet potr kez, 'me  
Deuz d'an hostaliri da danva e  
Ar mor eur wech bennag a leu

### ar soudard

Hallo, gwir a lerez, koulz eo d'  
Trist eo stad ar morer 'vel hini  
Demp da glask eun daken, da c  
Ma teui prestik ar c'houlz vo ke

---

*Son evid an I*

Ton : *An Durzunel.*

### Ar soudard

Forz a zo, ma fotr kez, soudard pe martolod,  
Gallout a ramp anzao ec'h eo pounner hon lod,  
Kaled eo ar vicher ha diot aliez,  
Evid ar Vretoned dreist-holl ec'h eo diez.

### Ar martolod

Ia vat, me 'meuz klevet penoz 'barz an arme,  
Ar paourkez Bretoned vije gret goap outé!  
Ha penoz ar « Maho » ne oa med eur pemoc'h,  
Daoust hag hen e ve gwir kement-se ganeoc'h.

### ar soudard

Siwaz ! Var ar poënt-se ec'h on akord ganid,  
Barz kazerniou hon Breiz, war ma fe, laran d'id,  
Normanted, Gallaoued, ha tud euz a Bariz,  
Dalc'hmad e fell gante iafe pep tra d'o c'hiz !

### ar martolod

Ama e trec'h ar mor war blankennoù ar zaout,  
Aze ma mignon kez, a teu ganemp ar maout,  
Mesk ar vartoloded, an dri c'hart zo breton,  
Ar Breton a zo mestr war c'hourre ar mor don.

### ar soudard

Gwell a ze, martolod, mez poent eo kimiada,  
Arru eo d'emp ar c'hlast ! Eur bla deut var daou vla.  
Kenavo, red eo mond. Ni 'n em welo er vro,  
Mar ma deu ket brezel da gas d'emp ar maro.

### ar martolod

Kemer amzer, soudard ! 'Benn ma teuo brezel,  
Ni 'momp kavet potr kez, 'mechaz beb a Gatel.  
Deuz d'an hostaliri da danva eur bannac'h,  
Ar mor eur wech bennag a leunio d'in ma zac'h.

### ar soudard

Hallo, gwir a lerez, koulz eo d'emp 'n em glevet,  
Trist eo stad ar morer 'vel hini 'r soudarded.  
Demp da glask eun daken, da c'houll digant Doue,  
Ma teui prestik ar c'houlz vo ken ezom arme !

## Son evid an Eureujou

Ton : An Durzunel.

### VI

D'an dud-ma nevez eureujet  
Me zouhet eur vue hir,  
Levenez hag evurusted,  
Neubeud a li er c'halir ;  
Madou ar Bed a zeziran  
E kaofent holl var o hent  
Ha pa vo fin d'ar vue-man  
Madou an Ne mesk ar Sent.

### VII

N'echuin ket ma c'hanaouen  
Heb goulen digant ar Mestr  
Skuill varnomp holl e sklerijen  
Hag hon miret digabestr ;  
Kreski tre an dud a Labour  
Unvaniez, karante,  
Pinvidigez hag Emzikour  
Breudeuriez, Librente.

## AN DENNERIEN BRETON

Ha glevet-hu, war griben ar meneiou  
O son tennou an Dennerien breton ?  
Hirio an de e vizont war ar siblou  
Varc'hoaz marteze vo war ar Saozon !  
Ar bolejou a iud en dennadeier  
Ha peb Breton a ia deuz e wella,  
Mez arog pell, marteze hon lanneier  
War an Estranjour vo leuriou-tenna.

En amzer goz, hon zadou ar Vretoned  
A oa brudet er brezelioù eston ;  
Mond a reent gant o daouarn unanet  
Ha gant ar fizianz bepred 'n o c'halon !  
Ha ni, potred, bezomp dign euz hon zadou  
Karomp hon bro beteg mervel 'vithi,  
Karomp hon Breiz ha savomp he bannielou,  
Enoromp ar Franz ha bezomp ganthi !

Prest a vefomp pa zistono ar c'horn-boud  
Evid gelven hon broad d'an emgan !

Er gear a Sant-Briek on soudard daou'la so,  
'Barz ar c'hazern Charner, ar goanta deuz ar vro ;  
Eno ar chambrou a luc'h evel gwer skler,  
Hag ar paketajou o zao plom'barz an êr.

### Ar martolod

Petra a glevan-me deuz da c'hinou, soudard ?  
Ha ! potrik paour, 'meuzaoun n'out man med eur c'hanfard ?  
Pesort chambre a luc'h vel pont eul lestr brezel ?  
Pelec'h zo muioe'h urz'vid er *Charles Matel*.

### Ar soudard

Té gomz brao, den a vor, ha lorc'h a zo ennout,  
Kaëroc'h eo da gojou evid n'eo da c'halloud,  
Rag ni, ar soudarded, a zo holl tud kaled,  
Triugent lur warnomp er marchou ve gwelet.

### Ar martolod

Esec'h war an douar co dougen sammou braz,  
Evit beva bemde hijet war an dour glaz,  
O pignat er gwerniou hag o checha heoriou,  
Hag aliez en riskl da goll hon bueziou.

### Ar soudard

Ni ive aliez a c'hall koll hon bue,  
Dre glenjejou stagus ha dre skwizder ive !  
Dre an derzien tapet o kousket deuz an noz,  
War an douar kaled, hep gwele da repoz.

### Ar martolod

N'euz forz ! Alier gwech c'houi gousk en eur gwele,  
Mez ni en eur hamak, 'tre ar mor hag an ne.  
Hon bue zo garo. Ni a c'hall chom tri miz,  
Hep diskenn d'an douar, kaer hon euz bea skwiz.

### Ar soudard

Ni dremen revuiou war an tachennou braz,  
Renket ha zonn'vel dir gant hon dillajou glaz,  
Ar c'hartouchierennoù hag ar sac'h ouz hon c'hein,  
Ar baïonetezou plom en er evel drein.

### Ar martolod

Fé ta ! Te zo pouffer ! Petra eo Ian Soudard ?  
Eur soudardik war droad n'eo nemed en c'hrennard.  
Ar merc'hed na blich d'ê nemed martoloded,  
En peb korn deuz ar bed ni a zo istimet.

### Ar soudard

Evit difenn ar vro, n'eo ket ar martolod,  
Deuz lavar ar re fur 'nefe ar gwasalod.  
Mez war ar c'hrennarded e kouefe ar bec'h braz,  
Ar boulejou hirie a lac'h pemp war dek gwaz.

### Ar martolod

Mar diskar pemp war dek brema ar boulejou,  
Ar mor a lonk'n eun tol kant war gant awechou,  
Ha pa zeu eur bouled da doulla eul lestr dir,  
Hema la bet ar fonz gant kemend den a vir.

# Son evid an Eureujou

Ton : *An Durzunel*.

I

Gwechall goz en hon Breiz-Izel  
Goude pred an eureujou  
E vije gwelet o sevel  
Barzed koz deuz ar meazou ;  
Hag heb skuiza hi a gane  
Rimou dispar brezonek,  
Hirio gant ar mojou nevé  
Na glever nemed gallek.

II

Koulskoude gouen ar Vretoned  
Zo deut bue d'el en dro,  
Barzed nevé o deuz kerzet  
Var roudou ar re varo ;  
Ha pa c'hent c'hoaz da eureujou  
Ar Famillou kalonek  
Evel gwechall goz o zadou  
E kanont en brezonek.

III

Pa bar brema ma daoulagad  
Var ar renkad taoliou-ze  
Ma c'halon zo karget a stad  
Dirag kaërder Bro Gerne  
Pelec'h vo gwelet kaëroc'h tra  
Diganac'h m'her goulén  
Evid pemp kant den o preda,  
Pemp kant a labourerien ?...

IV

Var o drem e sked ar iec'hed,  
Ar joa, ar gontantamant,  
Ama n'euz nemed mignoned,  
Den na goach e santimant,  
Ar c'halonou a zo digor,  
Ar sonjou 'zo memez re,  
N'euz ket var zouar an Arvor  
Par da Botred Bro-Gerne.

V

M'ho salud priejou eürus  
Zo bet unanet hirio,  
Ho famillou zo enorus  
Hag istimet dre ar vro,  
Ho kwrien a zo koz ha don  
Er barrez hag er c'hontre ;  
Gras d'ac'h ive a greiz kalon  
Da zével kalz bugale.

n Durzunel.

I

gwechall goz en hon Breiz-Izel  
de pred an eureujou  
ije gwelet o sevel  
zed koz deuz ar meazou ;  
g heb skuiza hi a gane  
nou dispar brezonek,  
o gant ar mojous neve  
glever nemed gallek.

II

liskoude gouen ar Vretoned  
deut bue d'el en dro,  
zed neve o deuz kerzet  
roudou ar re varo ;  
pa c'hent c'hoaz da eureujou  
Famillou kalonek  
l gwechall goz o zadou  
anont en brezonek.

III

bar brema ma daoulagad  
e ar renkad taoliou-ze  
c'halon zo karget a stad  
ag kaërder Bro Gerne  
ec'h vo gwelet kaëroc'h tra  
anac'h me her goulen  
d pemp kant den o preda,  
mp kant a labourerien ?...

IV

o drem e sked ar iec'hed,  
oa, ar gontantant,  
a n'euz nemed mignoned,  
na goach e santimant,  
'halonou a zo digor,  
onjou 'zo memez re,  
z ket var zouar an Arvor  
da Botred Bro-Gerne.

V

salud priejou eürus  
et unanet hirio,  
amillou zo enorus  
istimet dre ar vro,  
wrien a zo koz ha don  
arrez hag er c'hontre ;  
d'ac'h ive a greiz kalon  
evel kalz bugale.

Enoromp ar Franz ha bezomp ganthi !

Prest a vefomp pa zistono ar c'horn-boud  
Evid gelven hon broad d'an emgan !  
Prest a vefomp da grigi euz hon galloud,  
Na refomp a forz euz brezel na tan !  
Neuze welfer Tennerien ar Mene-Du  
Er penn kenta e-kreiz ar gwall danjer,  
Evid difenn ar bannielou glaz-gwen-ru  
Pe evid mervel hep koll o esper !!

Ia ! Eur fuzul a dlefe kaout peb Breton  
Ha diski tenna d'e vibien bihan,  
Diski d'e vab kaout lagad lem ha kalon,  
Karout c'houez ar poultr ha moked an tan.  
Ha hi vo prest vare'hoaz pa vezint galvet  
Gant an drompill, da zével eur bagad  
Da gemer plas ar re a vezo marvet  
'N eur zervich o bro e-kreiz an argad !

DISKAN

Deuz ar mene d'ar mor,  
Enor da Dennerien Arvor !  
Deuz ar mene d'ar mor !

